



**skrid**

**18**

# taolenn

## SKRID 18

BARZHONEGOU

OLIER AR MOGN      JEFF PHILIPPE

ELENA      Y.F.FOLLET      TEREZA

DANEVELLOU

PENNAROZ      Y.E.FLAGEUL

JOEL DONNAR

TROIDIGEZHIOU

LEROI JONES

A.A.DARVICHIAN

KELEIER

PRIZ AN NIVERENN: 8 LUR.



2

# olier ar mogn barzhonegoù



3

## AR VUHEZ

Kaoc'h  
Me' zo bet ganet e kreiz  
Ar c'haoc'h  
Gellet em bije klask gerioù luf  
Met n'em eus ket amzer ken  
Da glask ober plijadur deoc'h.

Emañ va fenn leun a zour

Komprenit, Mignoned  
Komprenit me ho ped  
Va flanedenn eo  
Skribouilhañ gerioù goulo  
Ha c'hwi o lenn anezho  
Spi ennoc'h kavout un dra-bennak.

Ho torn, Mignon  
Ken na veuzin em glac'har.

## AR MARV

Hag a-greiz holl  
E vin o treiñ da foll  
Va daoulagad o vlinkañ  
D'an netra  
Va daouarn o kregiñ  
En avi  
Va c'halon  
Evel plomm  
Diank, Diank  
Diank e vezin  
O...  
Hag ur ger a zo er bed  
Evit braouac'h va askre ?  
Hag a-greiz holl  
En em gavin  
En Tu All

HAG EZHOMM TITL' ZO ?

Hag a-greiz holl e voe sklaer

Kement tra

Dirak hon daoulagad trellet  
E kanas hor c'halonoù  
D'ar bed

bet prometet deomp

(keit-all' oa)

E tigoras hor muzelloù  
Evel n'oant morse bet digoret araok  
Hag e voe distaget gerioù-satin

Gerioù reizh

Gerioù hollveiz

Yezh an efedusted a rene war ar vro

ALL THINGS MUST PASS ....

Trumm a voe goloet ar vro  
Gant ur c'hleñved dianav  
Serret e voe ar stalafioù ha  
Prennet an dorioù  
Den ne oueze netra erbet ken  
An ankounac'h a oa ar vro

Ha pront e voe klevet an Ankou

Skrijadenn ziwezhañ ur vro.

BED - BAC'H

Piv' oar pe liv en devo hon dazont ?  
Du  
Pe ruz ?  
Bez ez eus tud a varv  
Evit glasaat an oabl  
Bez ez eus tud a varv  
Evit ledanaat hent ar frankiz  
Tud  
A bep tu  
O youal er ru

TAKATAK TAKATAK

Korfoù  
Ar gwad a ruilh war bavezioù  
Hor bed-bac'h  
Piv' oar da belec'h emamp o vont ?  
Tu ar marv  
Pe tu ar vuhez ?  
Bez ez eus tud a vev  
Ur menoz da gas da benn en o fenn  
Bez ez eus tud a vev  
Hep soñjal ne welint morse liv ar skoazell  
Tud  
A chomo mut  
En o bed direizh put  
Spontailhoù  
Ar gwad a ruilh  
War dal ar bugel a glaske  
Bruzunoù-spi  
En o bed-bac'h

19 a viz Here 1978

Kerzhet a ri war ar bili.  
Betek an inizi.  
Eno, e kavi an agripa.  
En em lakaat da ganañ  
A ri.

Klask a ri war an dour  
Adsked al lizherennoù aour.  
Neuze e c'helli digejañ anezho  
Ha monet gwall-bell ganto  
Arre.

Kemer a ri lusk an houll  
Ha monet a-enep da bep youl.  
Tremen broioù dianav a ri.  
Pa weli tan en tiez e vezi  
Erru.

Kerzhet a ri war ar bili  
Betek tan an alemant.

19 a viz Here 1978

GWELADENN

Peban edoc'h o tont ?  
Gouezet, morse n'em eus

Pe dra a vennec'h-c'hwi  
Gouzout, morse n'em eus graet

Amañ edoc'h neizheur  
O sellet ouzh glaouiadenn an oaled

Komzet ho peus, habask ha youlek  
Notennoù hiraezhus ar piano a glevemp

Ho taouarn war vrec'hioù ar gador  
Mezevellidigezh an dazont en ho kenou

Selaouet em eus, berr va reiz  
Hep krediñ atersiñ

Diouzh ar mintin, pa zihunis, e oan em gourvez  
war al leur  
Ha digor e oa chomet an nor

Pe dra a vennec'h-c'hwi  
P'ho peus kontammet va spered  
Gant ar morc'hed...

Kerzu 1978

KEMBRE. MYNNWN DDYFODOL !

Bale a ran. Gwenodenn un huñvre. Tremenet  
ur vro estren ha yen. Erru on. Ar mor don am eus  
treuzet dec'h.

Garv ar stourm amañ. Evel ra holl genvroiz,  
a gredan, em boa gwelet Bro-Gembre a-dreuz lатар  
falskredennoù. Nann, ho pro, n'eo ket ar baradoz  
war an douar.

Mes, amañ e c'hwezh un avel yac'h. Gwenc'hoarzh  
kadarn war ziweuz ar verc'h "SY'N STARAD CYMRAEG" er  
c'harr-boutin. Skuizh e oan. Faezh. Evet em eus ar  
gwenc'hoarzh-se n'am boa morse gwelet neblec'h em bro.

En tavarnioù em eus graet anaoudegezh ganeoc'h.  
Don a ritda doullañ kaoz gant al ledavour. Penaos'mañ  
kont e Breizh ? Wel ... Hag-eñ e ouzon brezhoneg ?  
Wel, kement' m eus da gontañ deoc'h, aon ganin rak  
dont da vezañ ur ranell ... Ledanoc'h hoc'h anaoud-  
egezh eus va bro eget hini an darn vrasañ eus va  
c'henvroiz. Sabatuet e voen. Ha trist.

Hurlink. Deut eo din e Kembre ivez. Ne ouezen ket ken a belec'h e oan. Kembre. Breizh. Va fenn o tarzhañ. Soñjal em eus graet e vije koulz din chom da vat e Kembre. Goude-holl ne zleen netra d'ar Vretoned. Marv' oa Breizh. Amañ e vez kavet spi war dremmoù an dud c'hoazh ...

Nann, nann ! E Breizh emañ va stourm, emañ va buhez ! N'emaon amañ nemet evit kaout nerzhioù nevez da gas stourm, va buhez, war-raok.

O c'havet em eus, e munudoù ar vuhez pemdeziek.

NID MALU AWYR MWYACH... Bevañ !

Bevañ... Ya, p'edon war draezh Aberystwyth e oa sklaer pep tra evidon.

Met, p'emaon o skrivañ al linennoù-mañ emañ avel an emzinac'h o c'hwezhañ e noz an dislavarioù.

Breizh-Vihan a zo klañv gant ar c'hoant gouzout hag-eñ ez eus c'hoazh anezhi.

Ul lodenn ac'hanon a zo chomet en tu-all d'ar mor hag emañ c'hoazh o c'houlenn ouzhin ma-unan ha ne oa ket ar pep priziusañ : an emfiziañs.

NID MALU AWYR MWYACH... I'R GAD !

Genver 1979

Joel DONNAR

### ROMANTELEZH ?

Ur paotr, ur skerb ruz gantañ en-dro d'e c'houlzoug, a dremen dirazon. Un neuz fuloret a oa war e zremm, 'gav din. Aet eo divar wel en engroez. Prederiet e oa...

Ken yen eo er maez ha ken tomm e oa eno. Tomm e oa e skalf da vizied moan, tomm e oa din. Ne chome nemet al lamp war enaou, du-hont, er gegin. Ur skleur a oa ganit etre div grommenn da zivronn hag a vroude ac'hanon. Er mintin e save c'hoazh kant frond warn-ugent diouzh da hivizh vreset. Soñj am eus (ken yen eo amañ) ur gridienn pep hini o sellout ouzh egile, el liorz-hêr, ken pell 'zo. Delioù ar c'histinenned o plavañ betek grozol ar balioù didud hag eeun dic'hoanag. En o sav pe bleget e oa ar c'hadorioù houarn, gleb ha didalvez-kaer er c'houlz-se : goañv. Klask a raen gwrez unan bennak. E pep lec'h...

(Ar bluenn houarn a zo he rimiadenn war ar paper damheñvel ouzh leñvadenn verr ur bugel bet kastizet ; n'on ket gwall-zouget da ouelañ).

Kerzhout a raemp asambles, dilavar, ken yen e oa. Petra 'vefe e dibenn hor c'hantreadenn ? Petra 'blijfe dimp kavout ? Ne gomzemp ket fonnus : ne soñjemp ket fonnus kennebeut. Peseurt froudenn a lakae ac'hanomp da vont war-raok. Kuit ar romantelezh bremañ : gant ar betoñs omp bet hoalet.

Mont a ra an awen da hesk, peurliesañ, pa sav un trouz bennak a sach an evezh. Torret eo an neudenn vresk (' Tre an hent-houarn hag an hent bras, e-barzh H.L.Moù ez eus moaien, marteze, chaokañ soñjoù, sevel barzhonegoù n'eus ket).

Un trid-kalon, er menezioù o lugerniñ en abardaez o vervel, an douareier hag an oabl ec'hon, traoù, atav. Pelec'h emañ an dud ? Ar gisti hag ar c'he-naouien, ar re vil, ar re binvidik (pasaat a ran) ha divesker ar merc'hed.

Ne zeuio ket. Emaon ouzh he gortoz abaoe ken pell. N'ouzon dare gant piv emañ-hi o c'hoari ? Sevel a ra ur vrumenn e-kreiz bremañ. Ma-unan-penn on. Kregiñ a ran da gerzhout kuit. Kleret eo ma daoulagad. Aet eo skuizh ma daoulagad dre forzh sellout en diamen. Mont a ran e-biou ur stal a zo kinniget ennipōstoù skinwel war enaou. E-pad ur reuziad e choman aze. Ha dav d'an abadenn war ar skramm bihan. Kregiñ 'ra ennon un enoc divent, spontus. Ne zeuio ket. Gwelloc'h dezhi mont da sutal...

Ale ! Distreiñ 'ran d'ar gêr.

GUORCERDORION

"...dou eterinn cant hunnoid..."

Dilestrañ 'raemp seder,  
War greiz an devezhioù,  
Taer hon daoulagadoù,  
En hon oadoù tener...  
Ganit 'veze gerioù,  
A blije din-me kaer...

Tremen a raemp e-biou  
Da vedoù trumm ha kann,  
Bedoù klok ha peurc'hlan,  
Gant da faltazioù...  
Tik e oan ken e oan,  
Gant da allazigoù...

Mediñ 'raemp well-pe-well,  
Ar c'hoantadoù dibren,  
Hag ar wirc'heotenn,  
'Hed hon huñvreoù brell...  
Trevadoù fonn ha gwenn,  
A bozioù diheboell...

Tebouezet e veze  
War lost ar ster ruz-kel,  
'C'haoliad war ar geidel,  
Diheud ha diere  
'Dan an nevoù hael  
Pegen c'hwek hon gwele...

"... Bet circhinn ir guolleuni..."

Siwazh ned afomp ket da stereta henozh ;  
Mouchet ez int bet holl,  
A-daol-trumm 'kreiz koroll.

Siwazh da Run-ar-Gof ne zeuio den henozh ;  
Skuilhet ar c'hwistantin,  
Ha torret ar c'hevren.

Siwazh dre ar maeziou, ne glevfor tra henozh ;  
Nemed yezhoù al lern,  
Ha hirvoud an adern.

mezheven 1978

Ha soñj 'zh eus, ac'hwilan,  
En hafiv ken melegan,  
Pan floure an heol  
Fronn an ed war o dramm,  
Drew 'oan gant selloù flamm,  
Ha karantez diroll...

Ha soñj 'zh eus, ac'hwilan,  
E tan minc'hwerzhioù glan  
An holl re a garan,  
A fenne dibreder,  
Roz aer ha gerioù taer  
Dre bradoù ar flagenn...

Ha soñj 'zh eus, ac'hwilan,  
En aberioù distan,  
Dindan skleur ar beure,  
Pa' m c'hilhas merc'h ar c'hro...  
He rambre oa breou,  
Ha'm huñvreoù he re...

O R O G E L L

"... Etncoihaam..."

Gerioù hud hag ivin,  
'Tasson fraezh ha sklinton,  
A-bell-da-bell, anterin,  
Da gaoud ar bedoù lirzhin.

Gerioù erc'h hag avel,  
'Troidellañ, strobinnell !  
A-uc'h d'ar pennoù diboell,  
D'ar c'healioù da sevel.

Gerioù boull, glan ha glein,  
4C'h eliennañ koulz ha strinkvein,  
A-stroll eus don an eien,  
Da bulluc'hañ ar bed brein.

Gerioù gorrek ha lor,  
Stank-ha-stank eus an Egor,  
A-gor ouzh ene toc'hor,  
Hag an efvorennoù gor...

Meurzh 1978

PENNAROZ

BEILHADEG

An avel but a yud tro-war-dro d'an ti klozet  
mat, hag a vann a-greiz-holl koumoulennouigoù  
maged war ar familh bodet e-tal an oaled.

Koazeet eo va zud-kozh war ur bank er c'horn-toull :  
va zud, va moereb ha me, azezet war gadorioù-plouz  
dirak an oaled, en em domm hag a sell'ouzh ar c'his-  
tin o krazañ hag ouzh an avaloù-mir o poazhañ din-  
dan ar glaou-bev. Ar flammoù, hag al lamp-eoul la-  
kaet war stal ar chiminal, a sklerijenn goustadig  
an dremmoù hag ar gwele-korn e-lec'h m'emañ kousket  
ur verc'hig. E traoñ an ti, eo teñval ha yen, Amañ  
e-kichen an tan, eo brav ar vuhez. E-pad ma strak  
strobadoù fulennoù, e vez preget a vouezh izel eus  
an amzer gwechall, eus labourioù an devezh, eus afe-  
rioù ar gêriadenn... Selaou 'ran, ha va diskouarn  
digor frank ne gollont bruzunenn ebet? N'am eus  
nemet un damant : ma komzont diwar-benn ar skol !  
Neuze e choman sioul, bihanig war va c'hador, hep  
fiñval. Met pa 'ya ar gaoz war an amzer gozh, e  
lugern va daoulagad, e reutaan va divskoaz hag e  
kroazan va daouarn war va barlenn... hag e krog  
koroll marzhus ar c'horriganezed, an hoperien-noz,  
ar gornanded, an holl bobl vihan a hent d'an noz,  
gwarimeier ha koajeier Breizh. Ya, me 'oar ! E-  
kreiz an noz e tihunin c'hoazh, sklaset va izili,  
hanter-vouget gant ar spont rak em bo hufvreet  
en eus Yann-Boned-Ruz arc'houell hor puñs plantet  
e grabinoù em gouzoug, pe en eus Yann-gant-e-  
forc'had-lann kaset ac'hanon gantañ betek al loar...

met evit an ampoent e selaouan en ur grenañ, va c'halon leun a spont dudius.

Chomit a-sav, eurioù re vuan ! Emaon e sellet ouzh ar bugel hegreidik e oan.

A-wechoù e konte va zad-kozh istorioù fromus e amzer brezel, pri ar fozioù-difenn, ar gaz mougus, ar vignoned gloazet hag hor c'halonoù a skrije dirak kement a euzh. Va mamm-gozh a ouie, hep he far, displegañ koñchennoù ijinet brav-tre ganti... hopala ! Ijinet, piv en eus lavaret ijinet ? Ma ne oa ket ganti e oa erruet an darvoud, eveljust e veze erruet atav gant un den anavezet mat ganti !

Henozh ez eus kaoz eus marv trumm ur gwaz deus ur gêriadennig dost... hag ez on morgousket un tammig e-pad ma flepont diwar-benn ar "perak, ma Doue ?", ar "mod 'ta", hag ar "c'houlskoude". Dao 'vo d'am mamm-gozh mont da veilhañ an hini marv, war-c'hoazh d'an noz. Diouzhtu emañ war va evezh pa welan daoulagad va mamm-gozh o lugerniñ a-greiz-holl, hag ur mousc'hoarzh dister o tenna-korn he muzelloù e-pad ma tistag : "Gant ma ne zigouezho ket ganin ar memes taol evit beilhad Joz-tev !"

"A ! Ha petra 'ta oa digouezhet ganeoc'h ?"

Piv en eus graet ar goulenn ? Me. Rak ar re all ne seblantont ket kurius a-walc'h. Marteze e anavezont an istor ? Met evidon-me n'eo ket ar memes afer, ha n'am eus ket c'hoant lezel ar gontadenn da vont da goll.

"Petra 'oa digouezhet ganeoc'h neuze, Nêñen' ? Kontit hoc'h istor din.

- O ma flac'h paour ! Keuz am eus bremañ da

vout laret kement-se ! C'hwi 'vo spontet, me 'gred.

- Paz, paz Nêñen'. Dibunit deomp an istor bremañ, peogwir ho peus komafiset.

- Tampir evidoc'h ! N'ho po ket fin ebet betek m'ho po torret va fenn din. Selaouit neuze. C'hwi anavez Jerm-Tev ? Hennezh zo mab d'ur Joz Tev, n'ho peus ket anavezet rak an istor-mañ 'zo kozh a-walc'h. Setu marv Joz Tev, ha me da vont da veilhañ anezhañ war e varvskaoñ ha da bediñ evitañ. Marteze e oa teir eur pa zistroen d'ar gêr. Gant al loar e lugerne he fas gwenn hag e oa evel e-kreiz an deiz. Paz van ur mouchig avel o tremen war ar roziou. N'am boa ket aon, nann, ne c'hellan ket laret ; met va c'halon a oa gwasket un tammig gant difich an noz, hag e oa strafuilhet va spered hep paouez gant ar soñj en oa ar paourkaezh Joz Tev paket buan e rabotoù hep gortoz bout kozh. Un taol gwad en e benn... ha setu anezhañ lipet krenn. Hag ez aen gant ma hent, e-giz-se tregaset... Erruet war ar roial e welan a-greiz-holl dirak ma daoulagad souezhet, ur c'had... ur c'had wenn.

- Ur c'had wenn ?

- Ur c'had wenn, ur pezh mell gad wenn, o sailhat dirazon, o harpañ, o treiñ davedon, o lammat en-dro pelloc'h, en ur fichal he lost gwenn hag he divskouarn hir, hir, ken hir evit re azen Ti Forn. Ha bep an amzer, e chome a sav, e selle ouzhin dre zindan, ha me da breg dezhi kreñv, hep soñjal : "O ma Doue, petra 'zo amañ ? Perak e sailhit mod-se dirazon loen ifern ?" Neuze, selaouit mat va bugale gaezh, respontet he deus din-me.

- O ! N'eo ket posubl Nêñen' ! Al loened ne gomzont ket.

- Marteze a-walc'h ! Ne larin ket nann. Met ar c'had-se a brege diouzhin. Ha gout a rit petra he deus laret din ?

- Hañ ! a droc'has ma zad, "mod ki Jann Fich, me 'barife, o tont deus ar fest en ur lipañ e bav, en ur fichal e lost, hag en ur laret : bet on bet ha mont a rin c'hoazh ?...

- Selaouit 'ta e-lec'h farsal. Hemañ 'vez atav oc'h ober goap. Serrit ho peg panevet-se ne dennfec'h poz ebet diganin mui. Un druez a vez erfin ober goap diouzh ur vaouez kozh ! Eur samant em eus ma merc'h-vihan a daol pled gant ma istorioù. Neuze respontet he deus ar c'had :

- Louizig baour, n'on ket ul loen ifern. Ul loen purgator ne laran ket. Ene Joz hoc'h amezeg, on.

Ha me didalpet da c'hoarzhin.

- Na rit ket goap diouzhin rak truezek emañ ma stad. Erruet oan dirak dor ar Baradoz pa 'n eus Sant Per, fuloret, chikanet ganin ha bannet ac'hanon er maez en ur grozal :

- Er maez, loen pimoc'h, re dev emaoch, re lart gant an holl gig ho peus debret d'ar gwener !

Ha setu anezho o skrignal hag o fringal war o c'hadorioù e-pad ma choman-me, sabatuet, gant va beg digor betek va brusk. Sur emaint oc'h ober goap ouzh unan bennak. Met ouzh piv ? Ha gwir e oa he doa gwelet va mamm-gozh ur c'had wenn hag a gomze diouti ? Nann, ar gedon ne gomzont ket, me oar an dra-se. Neuze he doa huñvreet ? Pe, marteze e oa hi ur vaouez hegredek ? Ne gredan tamm ebet emañ va mamm-gozh prest da grediñ n'eus forzh petra. Ha daoust hag e rafe hi goap diouzhin neuze ?

Bremañ e tap ar re vras ar c'histin hag an avaloù tomm-berv, hag e tebront anezho en ur flepiñ.

Ne lezan ket va lod ganto, met goustadig e santan va fenn o pounneraat ; ne c'hellan mui derc'hel digor va daoulagad ; trouz an avel o krozal war ar maezioù a luskell va soñjennoù. Ar c'houk a grog ennon hag a gas ac'hanon pell eus an oaled, war heñchoù marzhuz an huñvre e-lec'h ma lamm ha ma nij gedon gwenn dezho daoulagad don ha divskouarn seiz.

Touchant e kludo ma zad ac'hanon, morgousket, war e zivskoaz ; va mamm a gerzho en e gichen gant va c'hoarig war he brec'h, ha ni a yelo gronnet gant an avel, war-zu hon ti. Ni 'dremeno e-tal ar puñs, met n'am eus ket aon : Yann-Boned-Ruz ne bak ket ar vugale pa vezont gant o zud.

10/03/1978

Gerioù :

paketaoù e rabotoù : marv.

ur roial : ur roc'h plat.

Jef PHILIPPE

L A V A R O U

An den-se war gab e reor  
War zigarez e kave hir amzer e vakañsoù  
O vezañ ne oa ket koant a-walc'h evitañ  
Ar merc'hed o rouzañ war an traezh

Ha bisted un tammig gant e  
Re gorfad bier

A laras

E oa poent bras ober ludu  
Gant ar gevredigezh

II

Klevet e dibenn friko ar pennoù bras  
Etre div werennad Champagn  
Hag ur vreugeudadenn seven, didrouz :  
"An dud dilabour a zo holl anezho  
Lonkerien ha tud divalav.  
Mann d'ober evit gwellaat o stad  
Peogwir en em gavont mat e giz-se."

III

Ar person a laras en e sarmon :  
"Eurus re baour, rak gwelout a raint Doue."

Buan e tec'has kuit goude an oferenn  
Pedet e oa  
Da lakaat e gof ouzh taol pinvik ur bourc'hiz

IV

Ur mestr-skol a c'houlennas gant mab  
Un den dilabour  
"Ha te, petra 'vi pa vi bras ?  
- Pa vin bras, eme ar mous,  
Pa vin bras me 'vo pinvik."

V

Daeroù a oa war zremm ar skoliad  
" -Ma zad en deus kollet e labour  
Ha ken mezv e oa dec'h d'an noz  
Ken n'em eus ket gallet deskiñ ma c'hentelioù  
Gant an trouz hag an taolioù  
Ar boan spered."

VI

Jobig bihan n'helle sentiñ ouzh lezenn ebet  
Enepe d'an urzh.  
E dad hag e vamm a ouele war e droioù kamm.  
E skol ebet n'eo bet chomet  
Nemet an amzer da vezañ bountet er maez.  
Ur penn kalet.  
Ha peogwir ne zeue arnodenn ebet gantañ,  
Setu eo bet lakaet d'ober C.R.S.  
Ret eo difenn an Urzh, a larer.

Alkotest °

Ar jandarm  
N'helle ket bountañ em genou e c'hwezhigell.

Mezv dall e oa.

(° pe : mezvuzulier ! !)

VIII

Hemañ a zo evit difenn ar Vro.  
Ur mell labour a ra evit-se :  
Skrivañ d'ar re a zo en toull-bac'h.  
Ha dre-se, avat, e kav d'an dud  
Emañ-efñ o kas ar penn  
En dispac'h.

IX

Ar barzh ivez a gousk e goudor e bluñv.  
Kanet en deus buhez start  
An dud hep karantez  
ar beorien disprizet  
ar vicherourien vac'homet.

Ur vestrez vrav en deus kavet  
Paeet mat eo bet

Ha gwerzhed en deus ur bern pladennoù.

X

Rak, e giz ma lavare ur paotr kozh, du-mañ ;  
"Bugale an Aotrou Doue  
A zo bep seurt anezhe."

A. A. DARVICHIAN

NADARADE °

"Niaz° Ali Nadarade"

"Amañ 'maon".

Ar wech kentañ em boa gwelet anezhañ e oa azezet e-tal kan an ti-skol. Teuc'hal a rae ha gant pep barrad paz e veze todoroset. Distaolet en doa gwad sklaer ha torchet e c'henou gant milgin uzet e chupenn. Diouzhtu goude e oa deuet endro er c'hlas evit azezañ war ar skaoñ kentañ. En eilvet klas° e oa ; un tamm paotr bihan ha distronk a veze gwelet splann e wazhienn-gas o talmiñ dindan e c'hroc'hen evel hini un den terzhiennek.

Staget en devoa e greion ouzh toull bouton e chupenn gant ur sifeleenn. Ken berr e oa e damm sifeleenn ma ranke bountañ e gof war-raok evit skrivañ ; evel pa'n dije skrivet gant e gorf ha n'eo ket gant e greion.

Krenañ a rae e zorn bewech ma rente din e zeve-rioù. Furchal a rae e boest-lastez ar skol a-benn kavout paper. Bep taol ma raen ur groaz° war e zeve-rioù e seblante din ober ur groaz war e vuhez.

Ne zistroe morse d'ar gêr da greisteiz. N'eus forzh penaos an darn vrasañ eus ar skolidi a rae egistañ ; harp ouzh mogerioù tilh ar skol e chome

ar skolidi da chaokat bara diazez an derc'hent. Eñ a veze gantañ ivez e damm bara en e c'hodell.

E votoù plastik o doa laosket ur roud ruz gouliet war e dreid.

Labourat a rae mat ha speredekoc'h eget ar re all e oa ; gouest e oa zoken da lenn talbennoù bras ar c'hazetennoù.

Un deiz, a-greiz peoc'h ar c'hlas e oa bet dennet evezh ar skolidi gant sarac'h an avel ouzh ar gazetenn a oa bet lakaet e-lec'h gwerenn ar prenestr. Goulennet em boa digant Niaz Ali :

"Gouest out da lenn ar gazetenn, Niaz Ali ?  
Gouest out da lenn ar pezh a zo skrivet ?"

En ur zont ruz hag en ur valbouzat en doa fraoel-let un nebeut gerioù ha kroget da lenn :

"Skrivet eo, ur chupenn, Aotrou."

"Mat tre, dispar, kendalc'h 'ta."

"250.000 touman (170.000 lur), Aotrou."

En ur sachañ endro war e anal e oa chomet e sell paret warnon kent dezhañ lavarout :

"Skrivet eo brav a'at ! Na pegen bras 'vez !"

Respontet em boa :

"Gwir eo Niaz Ali, an traoù-se a vez skrivet e lizherennoù bras er c'hazetennoù."

"Niaz Ali Nadarade."

"Amañ emañ."

E anv a oa Nadarade. N'eus forzh penaos e oa Nadarade anv ur yoc'h skolidi.

Pa zistagen e anv e c'hourlamme bep tro ; dre lentegezh e klaske kuzhat ouzhin e greion ha respont

a rae gant ur gwic'hig :

"Amañ emañ."

Neuze e tenne e vouezh da hini ur vran a vouger en un dorn.

E c'hoariell nemeti a oa ur volotenn en doa fardet diwar paperennoù breset hag un nebeut tammoù fiselell. Pa veze ar re all o c'hoari, eñ a vane mut, e-kichen ar voger, o stardañ e volotenn en e zorn. Sellout a rae ouzh an oabl, keuz bras ennañ da welout ar re all gant o c'hoari. E baz a vire outañ a c'hoari ha skopañ a rae gwad.

C'hoant em boa da gomz muioc'h outañ. Un deiz e oan azezet war ar skalieroù. Dedostaet eo hag eo aet da azezañ e-harz an diri ; e volotenn a oa gantañ en e zorn. E bennoù daoulin lous a veze gwelet dre douloù e vragoù. Goulennet em eus outañ :

"Emañ 'maout e chom Niaz Ali ?"

"A-dreñv ar wikadell", Aotrou."

"Pe anv eo da dad ?"

"Barv gwenn a reer anezhañ, Aotrou."

"Petra a ra ?"

"Netra, Aotrou. Re gozh eo. Chom a ra dalc'hmat er gêr o treiñ pajennoù e levrioù relijion, Aotrou."

"Ha da vamm, Petra a ra ?"

"Kollet he deus he labour, Aotrou. He dent a-raok a zo kouezhet dec'h ha kollet he deus he labour."

P'am eus klasket gouzout an doare em eus gouiet e oa bet he mamm o labourat e ti "Mache Baghère", marc'hadour frouezh sec'het ar gêriadenn. He labour a oa "Khadan kardane" an hueganou. Digeriñ a rae hueganou gant he dent evit ur gopr a 25 rial (1,501)

an deiz. Goude un nebeut bloavezhioù labour he doa kollet rac'h he dent hag he labour.

E vreur henañ a oa micherour en ti-saverezh. Daou vloaz 'zo pa oa distroet eus e goñje e oa marvet en ur gwallzarvoud labour, leuskel a rae hec'h-unan e familh war e lerc'h.

Erru e oa ar goañv endeo. Ar vugale a zeue eus ar c'hêriadennoù pell. Pa zegouezhent e tennent da skornennoù. O malgudennoù, o abrantoù hag o frioù a oa kleret. Pa zivalvennent e veze klevet un trouz e-giz ma vije bet frotet daou damm gwer. Azezañ a raent e-tal ar fornigell tommet gant keuneud evit distagañ an tammoù skorn diouzh o fri. Ar re vrasañ, ar skolidi eus ar c'hlasoù uhelañ, gant o mourroù kentañ nevez-diwanet o doa pezh mourroù bras kleret-rac'h. Ha pa lakaent o "guivehs" war ar fornigell e save flaer an treid hag ar plastik losket. Diverañ a rae an dour eus ar "guivehs" hag eus an arc'henadoù plastik ha glebiañ pep tra tro-dro d'ar fornigell.

Va c'hambra a oa e-tal ar c'hlas. Mod-se e welen dre ar prenestr ar vugale o tont d'ar skol bep mintin. Pa ruze Niaz Ali davet ar skol e tenne d'ul labous bet staget dezhañ e dreid gant ur sifelen. Goude ar c'hentelioù e c'houlenne digant ar skolidi dont da gontañ un istor. Un deiz e oa tro Niaz Ali, da gentañ ne felle ket dezhañ komz. Hogen pelloc'hik, gant krenoù en e vouezh ha liv e lentegezh war e zremm en doa kroget da zibunañ e huñvre :

"Huñvreet em eus e oan aet da filip. Nijet em eus, ken em eus ; lammet em eus diwar an doenn er porzh hag eus ar porzh war ar volz. "Pebezh gwal-leur" eme va zad "setu hor bugel troet e filip."

Ha d'an ampoent em eus gwelet va zad o vont da filip, eñ ivez. Aet eo da deurel e bouez war e levrioù. Da gentañ, mamm he deus c'hoarzhmet met goude he deus kroget da leñvañ ; hag a-greiz holl eo deuet tre ur pezh mell aerouant. Ouzh e welout va mamm oa spontet-tout "Doue r'hon miro, Mache Baghère eo" emezi. Neuze he deus staget da "ghandan kardane" an hueganoù ar buanañ ma c'helle. Gwelet em eus va mamm aet dizant gant ar gwad o tiverañ eus he genou. O vont da sailhañ war an aerouant e oan da ziframmañ digantañ e zaoulagad. D'ar poent-se he deus lavaret din un huegan en ur c'hoarzhin : "Diframmañ digantañ e zaoulagad ne servijo da netra, ni raio un dra bennak e lazho gant ar glac'har." An holl hueganoù 'zo dirollet da c'hoarzhin asamblez kent serriñ o genou.

Aet eo an aerouant d'ar c'hav hag o welout an hueganoù prenet ganto o beg en deus lavaret dezho : "Gwelet e vo 'pezh 'vo gwelet !" Hag aet eo da ger-c'hat ur mell bazh da skeiñ gant an hueganoù.

Goloet a zent e oa leur ar c'hav ha p'eo deut endro en deus ripet hag ur pezh lamm en deus tapet. Kerkent an holl hueganoù o deus kroget da c'hoarzhin adarre en ur ziskouez o dent. Mache Maghère a oa laouen-dreist. Neozh an hueganoù o deus soñjet "Gwell eo deomp chom hep c'hoarzhin ." E seizh gwellañ a rae an aerouant d'o lakaat da c'hoarzhin. Astenn a rae e c'houzoug d'an nec'h hag e lonke ar stered ; piklammat a rae ; luchañ a rae e zaoulagad hag e rae d'ar stered dont er-maez dre e zivskouarn.

O welout anezhañ gant e jestroù em eus c'hoarzhmet. Kentizh ha m'en deus va c'hlevet an aerouant a zo distroet ; gwelet en deus ac'hanon hag en deus laret : "Hañ, hañ te eo 'teus fardet pep tra" ha trumm eo sailhet warnon. Klasket em eus lammat e-maez ar prenestr met strishaet e oa anezhañ. Em

c'hichenig, un huegan en deus lavaret din : "Pign war va c'hein ma loc'hamp kuit."

Troet eo an huegan e karr-nij ha me a oa a-ramp warnañ. Va c'haset en deus dre ar siminal betek an neñv. Me em boa c'hoant kutuilh ur steredenn evit mamm, dezhi d'hec'h ispilhañ en he c'herc'henn. Met, a-daol-trumm em eus ripet. Gwelet em eus eus an nec'h, ma zad o fardañ tilh da c'holoñ an doenn ha kouezhet on e-kreiz war ma fenn, ul lamm em eus graet. Santet em eus takennoù dour a gouezhe eus al lein war va fenn."

An holl o deus kroget da c'hoarzhin ha da stlakañ o daouarn. Pa oa o vont da azezañ e oa 'giz un houadig, o redek davet e neizh.

Ar goañv-se e oa yenoc'h eget ar re a-raok. Peur-c'holoet e oa bet ar prenestr gant kazetennoù ha tannoù kartoñs. Ur mintin edon o lenn ar roll-galv evel boaz.

"Niaz Ali Nadarade."

Klevet em eus chuchumuchu gant un nebeut skolidi o deus respontet :

"Mañ ket amañ."

Gourlamm em eus. E blas a oa goulllo. Un dristidigezh divoas en em ziskoueze war dremmoù ar skolidi ha stouet 'oa o fenn ganto. Goulennet em eus digant "Abkar" abalamour da betra ne oa ket aze Niaz Ali. Respontet en deus ouzhin :

"Marvet eo dec'h, Aotrou. Gant ar yenijenn, Aotrou. Skopet en deus gwad ha marvet eo en ur lavarout : "C'hoant 'm eus kaout ur sterenn, ur sterenn vray evit mamm."

Sioul e oa pep tra er c'hlas. An avel a argade ar prenestr hag a heje ar gazetenn. Klevet e veze ur sarac'hig e-giz pa vije bet Niaz Ali o tibunañ pe ur gontadenn pe e huñvreoù.

Klevout a raen e vouezh o lenn ar gazetenn. Mouchet e oa an aobl gant ur pezh duadenn. An holl a oa sioul. Ma selloù a yeas da barañ war ar gazetenn nevez a c'holoe ar prenestr. Skrivet e oa e lizherennoù bras :

AR YEC'HED EVIT AN HOLL.

(brezhoneg gant Job STRULLU)

#### Notennoù

° Nadarade e Persaneg a dalvez kement hag "an hini n'en deus netra".

° Niaz a zo kevatal gant "ezhomm" pe "ziouer".

° An eil bloavezh e Bro-Iran a zo an eil bloavezh eus ar skol vihan e Bro-C'hall.

° E Bro-Iran e rank pep skoliad rentañ e zever d'ar mestr a ra ur groaz warnañ goude bezañ lennet pe zoken a-wezhoù hep bezañ lennet.

° Gwezharall e oa ar c'heriadennoù gwikadelloù anezho ha rac'h ar gêriz a veve e-barzh. Goude eo deuet ar c'heriadennoù da vezañ ar pezh int bremañ. Da lavarout eo seurt tiez disrannet an eil re diouzh ar re all en-dro d'ar wikadell pe e-barzh.

° Khandan Kardane an hueganoù a zo un droienn-lavar

evit ul labour graet gant merc'hed nemetken e Bro-Iran. Ret eo dezho digeriñ an hueganoù gant an dent ha tennañ un tammig an danvez e-maez ar grogen.

° Ur seurt botoù kotoñs gant solioù plastik. Graet int gant an dorn gant ar gouerien pe ar c'houeria-dezed.

Ar pennad-mañ a zo bet tennet eus levrig "Al lennegezh araokaour e Bro-Iran" gwerzhet gant unvaniezh ar Studierien Iranat e Bro-C'hall. Fellout a ra d'ar re-mañ e vefe anavezet er bed a-bezh ar strivoù kalonek a ra arzourien o bro evit sevel mouezh ar bobl dreist mogerioù an toulloù-bac'h faskour ha ragachadeg al ledarzurien gwerzhet da lez ar Chah. A-bouez e oa lakaat e brezhoneg Nadarade A.A. DARVICHIAN evit emouiziekaat al lennerien ouzh stad ar bobl en ur vro sikouret stank gant Bro-C'hall, lezvamm ar bed dieub. Troidigezh gant Job Strullu.

ELENA

Karantez, Karantez !  
Perak emhout o trubuilh ac'hanon ?  
Emaout o sevel ur gwall-amzer ennon  
Emaout o tisplantañ koaded ennon  
Emaout o tistrujañ ur galon yaouank  
Ne roan ket dit ar gwir  
Da c'hoari gant va c'halon  
D'ober goap outi  
Da leskel anezhi da vervel !  
Ha ne c'helli ket hen ober !  
Kar en em garout a ran  
Me va-unan  
Va c'horf, va spered  
N'am eus ket ezhomm  
Ac'hanout ken  
Bez e c'hellez mont da zastum brennig  
E lec'h all  
Ha betek fin va buhez  
E kanin, e c'hoarzhin  
E valein  
War hent ar wirionez.

ELENA

Selaou al labous o kanañ 'ta !  
Sell braoidigezh ar bed-mañ  
Gant da zaoulagad, da ziskouarn  
Da c'henou, da zaouarn !

Ev an dour o ruilhañ !  
Red en avel foll !  
Lamm dindan ar glav !  
Kemer dorn ur bugel bihan !

Dafis gant da vignoned !  
Kan 'vit da blijadur !

Met ne c'hellez ket ankounac'haat  
Emaout da-unan er bed  
Den ne c'hell netra evidout  
Ne vi saveteet  
Nemet ganez.

Yann-Erwan FLAGEUL

BUHEZ UR VILIN E KREIZ BREIZH ETRE

AR BLOAVEZHIOU 1910 HA 1940

A-raok ar brezel-bed kentañ e oa war ar stêr  
Dore etre Plougernevel ha Rostren pemp milin,  
tost-tre an eil ouzh eben. Graet am eus un tamm  
enklask ha digouezhet on da gentañ e ti Job R.  
hag a zo bet miliner goude ar brezel. Va zad-kozh,  
bet portezet adalek ar bloavezh mil nav c'hant  
c'hwec'h warn-ugent, en deus displeget din penaos  
a raed evit kaout greun da valañ.

Job R. eta, en deus kroget gant e vicher  
miliner da drizek vloaz ; da gentañ ez ae da  
zastum sac'hadoù greun. Mont a rae war gein ur  
penn-kezeg, hogen, stank e veze ret dezhañ klask  
skoazell gant unan bennak evit sevel ar sac'hadoù  
eus al leur betek lein al loen ! Rak ne oa ket  
nerzh a-walc'h gantañ evit dougen sac'hadoù ken  
ponner. Tenne e oa evitañ, met ivez evit al loen  
peogwir, pa oa erru kozh, e oa kromm e gein, gant  
pouez ar sac'hadoù en devoa douget. Va zad-kozh  
evel 'm eus lavaret abretoc'h en deus kontet din  
e labour d'ar mare-se. Ar sac'hoù da gentañ n'o

devoa ket an hevelep stumm ha bremañ : hir ha moan kenañ e vezent, evit ma c'hellfent derc'hel mat war gein ne vern peseurt penn-kezeg. D'ar beure e roe va zad-kozh kerc'h, foenn ha dour gwenn d'e jav. Dour gwenn a oa dour gant bleud e-barzh ; an dra-se hervezañ a oa diouzh ar c'hentañ evit magañ ur penn-kezeg. An hentoù neuze ne oant ket evel bremañ : ne oa ket makadam na tra ebet evel-se c'hoazh, war ar maez ne oa nemet hentoù treuz ha don, gant kleuzioù goloet a wez. E-pad ar goañv an douar a zeue da vezañ pri ha bouilhenn, ken ma yae ar jav betek e gof e-barzh. Ne oa ket tu d'ur c'harr tremen. Neuze e tistaged ar c'harr diouzh ar penn-kezeg, hag ur wech erruet en atant e lakaed ar sac'hadoù greun war gein ar jav. A-wechoù zoken, treid va zad-kozh hag a oa a-c'haoliad war ar marc'h a veze glebiet gant ar pri a veze warno ! A-wechoù c'hoazh e c'hoarveze d'ar sac'hadoù greun pe bleud kouezhafi e pri ar poullou bras, ne oa ket gwell blijus. Pa ne veze nemet troadoù berr da ober, ne implijed ket ar c'harr, gant ar jav hepken ez ae ar portezet da zastum e c'hreun. Goulennet am eus neuze gantañ penaos e veze graet evit derc'hel soñj pegement a sac'hadoù a oa dleet. Respontet en deus din, n'en doa ket ezhomm da skrivañ evit derc'hel soñj, met memestra ne veze mesket nag ar greun nag ar bleud. Pep hini en devoa ar gwir da gaout bleud e c'hreun, rak bez e oa a bep seurt greun : hini mat, met ivez a-wechoù hini falloc'h. Setu perak e oa karget da gentañ sac'hadoù greun an dud ar pellañ diouzh ar vilin, hag an dud an tostañ diouzh ar vilin e veze karget o sac'hadoù d'an diwezhañ, war lein ar re all evit ma vefe aesoc'h anavezout anezho. Pouezet veze ar sac'hadoù greun en atant, hag ur wech malet er vilin e vezent adpouezet evit gouzout petra mirout evit paeañ ar miliner. Ret eo lavarout memestra e rae ar miliner e droad e-pad an deiz evel-just, met

an ozhac'h a oa ivez o labourat er parkeier gant e vevelien, mar oa. Ne chome er gêr nemet ar wreg ha ret veze dezhi mont gant ar miliner er solier evit pouezañ ar sac'hadoù bleud. Setu perak e lavare an dud, diwar-benn ar vilinerien, traoù a oa gwir evit ur rummad anezho, ha ne oant ket evit ur rummad all. A ! miliner laer... E parrez Plounevez e vired etre dek ha daouzek dre gant. Job R. a vire nebeutoc'h, seizh dre gant a-raok an eil brezel bed. Gant ar pezh a chome ganto, ar vilinerien a c'helle gwerzhafi bleud da vac'hadourien eus ar gêr dostañ. Bep pemzek deiz e veze kaset ur sac'had gwinizh da valañ evit gallout ober bara. A-wechoù e c'hoarveze ma oa ezhomm bleud gwinizh du evit ober krampouezh : kaset e veze neuze ar sac'had gwinizh du d'ar vilin. Pep kouer en doa e vilin, da lavarout eo, e oa boazet pep hini da reiñ e c'hreun d'an hevelep miliner. Alies e veze ar miliner tostañ ouzh e vereuri. Met penaos e veze drailhet ha malet ar greun ? Displeget en deus Job R. din ha setu, en berr, evit ma vo sklaeroc'h penaos e veze graet. Ar milinoù-se a droe gant nerzh an dour : ne implijed ket milinoù avel ken, met va zad-kozh en deus soñj da vezañ gwelet ur vilin-avel, pa oa bugel, hogen, abaoe pell 'zo ne droe ket ken. Pa ranked eta lakaat ar vilin da dreiñ, e veze savet ar bailhoù, ha dour ar "bir" a gouezhe gant nerzh hag un toullad pezhioù koad a lakae da dreiñ en un tu pe egile ar pezh koad da heul. Setu penaos e troe ar maen Champagn kelc'het-se. Hervez Job R. e oa maen Champagn an hini oa implijet. Souezhus a-walc'h eo, peogwir e oa kalet kenañ an daou vaen implijet en e vilin. Ar greun a gouezhe dre greiz ar vaen Champagn hag a veze drailhet evel-se. Ur wech an mazer e veze ret benañ ar maen, evit ma vefe troc'husoc'h. Ne oa ket atav

gwell aes renkañ ar mekanikoù-se pa oant direizhet,  
bez e oa un den a oa e vicher ober war o zro :  
ur moulajer an hini oa. Galvet e veze da zont  
petramant e teue diouzh e benn, da welout tra  
pe dra a c'hellfe treiñ fall.

Bremañ n'eus ket mui eus ar seurt labourioù-  
se. An div vicher-mañ 'zo aet da get. Koulskoude,  
karet ha brudet e veze ar bortezerien hag ar vou-  
lajerien. Dre forzh mont eus ur gêriadenn d'eben  
e tigouezhent da c'houzout kalz a draoù. E pep  
lec'h e vezent gwelet mat. Ma errue en un ti ben-  
nak war-dro kreisteiz pe beder eur e veze goulennet  
gantañ "E ! portezet ! sec'hed 'p eus ? Deuit  
d'evañ ur chopinad jistr neuze !"

A-wechoù e veze galvet diouzh pell evit dont  
d'un nozvezh bennak evit kontañ e istorioù, a bep  
seurt e veze : bourrus ha fentus evit ar vugale,  
sirius (da skouer istorioù diwar-benn an Ankou)  
evit ar re vrasañ.

Kollet ha kollet da vat ez int bremañ ; ne  
chom nemet ar soñj. Soñj an amzer a-wechall, a-  
raok an tredan... Met hor bugale vihan (ar re a  
zeuio a-benn hanter kant vloaz) a lavaro ivez  
en ur gomz eus an amzer a-vremañ : "en mazer-se  
o doa an dud amzer da vevañ !"

Tereza

GWELADENN

Bez 'ez eus tud  
Sec'h evel gwez marv.  
Ho spiañ 'reont dizamant  
En gortoz eus n'ouzer peseurt strebot  
An hini 'maoc'h o vont d'ober a-dra-sur  
Kement a blijadur a raio dezho.

N'ouzont ket piv oc'h  
Ha n'ouzint morse  
N'int ket chalet gant kement-se.  
Aze 'maoc'h evit klevout o sorbiennoù  
Ha lavarout pezh a c'hortozont e lavarfec'h.  
Met ken nebeut hoc'h eus-c'hwi  
C'hoant d'hel lavarout.

Tud eus ar re wellañ int  
An dud a seurt-se.  
Ha ken kreñv e kredont an dra-se  
Ma teuoc'h un deiz d'hen krediñ d'ho tro.  
Setu da vihanañ o spi  
Pe neuze oc'h truekoc'h c'hoazh  
Eget na soñj dezho.

Ho karout a raint c'hwek-tre  
Un deiz  
An dud-se.

Pa voc'h aet da anaon  
Na petra 'ta.  
Neuze e c'hellint en diwezh  
Krediñ e soñjit evelto.  
Laket e voc'h ganto da sant  
Post mortem  
Pa baouezo ho taoulagad kloz  
Da lavarout dezho  
Disafar  
Evel hiziv  
Bezit 'ta pezh ez oc'h !

Tereza

### EZVEZAÑS

Un dra espar a zo eus an ezvezañs  
Rak hi hepken a ro tro deoc'h  
Da brizout evel ma tere  
Fetisted ar bezañs.

Ezvezañs, mokedenn skañv  
Goulloder damvezvius un tamm  
Amzer etre krommelloù  
Ma vez laket a-gostez  
Mil chadenn bemdeziek  
Ar bezañs.  
Chadennoù divec'h a-dra-sur  
Kenwead neudennoù stignet a-hed an eurvezhioù  
A ganevedenn bep ar mare  
Evel gwriad ar gevridenn da c'houlou-deiz  
Pa darzh bann kentañ an heol ;  
A breizh ivez 'vel ur roued  
An devezhioù rec'hus  
An devezhioù a netra  
An devezhioù ma vez an den  
Ur samm dezhañ e-unan.

Ezvezañs.  
Sioulded digustum  
Dor serr war ur pezh digenvez  
Traezoù renket evel sonnet.

Piano didrouz  
En e gluch evel ul loen morvitellet.  
Ezvezañs a dro da hun  
Pep tra a hañval kousket.  
Ezvezañs a zeu da vezañ goullo  
Enkrez displann o nijal  
Diskrog soutil diouzh ar gwirvoud.  
Ezvezañs, tu-eneb ar bezañs.

Bezañs gwriennet en don-donañ ac'hanoc'h  
Doues a c'herioù, a drouzioù, a jestroù.  
Bezañs gortozet  
Goanaget  
Bezañs warc'hoazh.

LEROI JONES

ARGAS

( huñvre Alighieri )

Lec'h torret : o dremmoù azezet o terrif an eil egile. Evel heolioù, ar vibien skuizh o c'halon o deus kuitaet ar Su. An Nort, diwezhatoc'h he deus leñvet warnañ, ur mezvier, un den o deus soñjet a-benn ar fin. Duoc'h e oa c'hoazh en deñvalijenn. An avel ken skañv a evas anezhañ.

Dremmoù torret. Gweledva ar gozhni. Brevet, o vezañ gwelet ar bloavezhioù du. Eskern en dremmoù dir. Eskern houarn. Rivinoù e-barzh kaouedoù. Gleb eo ar pavezioù e-kichen karrdioù an arme. C'hwez ar bier, sadorn. Gwelet o deus ken nebeut a draoù kaer, betek bremañ.

Keleier chevrenned. Duet er straed. Degas a raen boued deus un amzer daouarn-fichet. A-drefiv, gant ur vantell. Tapet, o youc'hal war ma bizied. Dremmoù torret, blev gwagennek, cheuc'h flas. Ret eo din lavarout da unan bennak ez karan. Int. War ul linenn dirak ar peulgae. Sunet he deus ma zeod. Rous, rous gwirion, met blev livet. Mouezh moan ha dous, pikoù-panez. Ur vatezh.

Mezh warnout. Krenañ ra da zaouarn. Gaou t'eus lavaret er c'harrdi. Gaou t'eus lavaret dec'h. Echu eo gant an dañs, diskenn gant an diri a-drefiv, betek ar c'harr. Tremen anezhañ en ur redek, endro d'an ti bras. Court Street, goude ar c'hroazhent,

buanoc'h, 'n ur boutonañ ar c'hardigan, betek Morton Street. Lamm a-drefiv ar c'harr. Lez Apple da dremen ; un nebeut re all. Bremañ diskenn adarre Court Street, ar baotred yaouank ne c'hellent ket redek. Treuz High, e-kichen ti Graychun, Ti ar Studierien, ti Donald ar Gogez, ar juzevien, war-du Kinney. Un nebeut tiez, pelloc'h e varv goustadik juzevien kozh ha tort dindan al loar. Tremen anezho. Tremen anezho. O eskern hag o bezioù. Dolarioù gleb staget ouzh ar peulgae. Tremen anezho, ar mezeg e ti Maltie, Waltine, tro e Quitman. Gorrekaat un tammig, ket re. Dre klub ar Gaouenn, Frankie, breur droch Dee, gra dezho sin gant an dorn. Diskenn an diri a-drefiv, ar pri, ha goude ar maen. Ar bilhard, Eddie a vousc'hoarzh, a ziskouezh e dog, a strilh alc'houezioù e garr, niverennoù pellgomz. Somerset hag ar ranndioù. War-du 'Montgomery, tro davet Barclay. Ar goulou, ar selloù. Bandennoù, darempredoù en em grou a vo displeget diwezhatoc'h. Dremmoù dianav, boutin, ar re wellañ anavezet bremañ. Beoù du digor, trepasoù o flaeriañ, e vizied a sach war ar bragou lien melen hag a ziskenn e-barzh. Ur biz daoulagad ar plac'h a zigor hag a serr - he beg digor a gouign, hejet don du.

E-kreiz ar straed, eeun davet al loar. N'ez ket tost d'an tiez. Re a zigoroù, dorioù, liorzhoù. Eeun davet al loar, pign gant Barclay. Tirolean gwer, kleier louet, morianed. Moked er goulou e Spruce. Charles Curtis, hippi. Met tro araok Herman pe Wattley. Kerzhout a reont e-barzh prizonioù gloan, chadennoù gloan, bloavezhioù dindan an douar. Kalc'hoù marv o ruzañ, daoulagad gwenn en ec'honder. E-kichen ti Diane hag ar gwez o vranskellat he c'hig kuzhet. He bizied, he beg, he daoulagad, an traoù nemeto am boa. Ha youc'hal a ra bremañ a-

dreuz douster he roufennoù din d'he c'hemer. Ul leanez.

Deus en-dro, war ar riblenn adarre, troenniñ a ra mezverien ar sadorn, an tiez-pesked a vazailhe, morianed kreniet o vervel hep tra da vutunañ. Migoned, enebourien, tud dianav, gogezed, o choual kreñvoc'h eget pep tra. Paotred oc'h en em flourañ dindan ar porchedoù. Viltasoù o kuzhat o forzh. Dremmoù du marv o treiñ goustad da ludu.

Tanioù, Bubbles, Kennie, Rogie, Junie Boy, T. Bone, Rudy (All Hillside Place) pe Sess, Ray, Lillian, Ungie, Ginger, Shirley, Cedie Abrams. Pelloc'h, dilec'hiet, e red gwad war ar riblenn dindan an apoueilhoù. Lynn Hope a gerzh a-hed Belmont Av., ganeomp holl. An Tri Mouskeder en National. (Waverly Projects). Tremen anezhañ. Sinadoù a reont deomp diouzh ar stalioù. Heol ha grouan pe an tri, an toull a zigor ha bravoc'h evit Statie eo. Un hippi, kemm tizh, hanter-dro, stop, war-gil, un hippi, hanter-dro... hag un den hepken o tont war ar c'hostez... pet mil gwech en deus an dra-se treuzet ma fenn, an niver bloavezhioù zo bet ret kaout, gwelout anezhañ aze, o tont brav a-dizh warnon, da dri metrad deus al linennoù melen, da zek metrad ouzhin. A-hed ma buhez em eus e welet o tostaat, ha me oa o soñjal treiñ, sartañ pe mont buanoc'h, 'n ur pediñ evit an tizh. Dont a rae ar respontoù buan-buan met leun oa ma fenn gant ar gwad : oberiañ hep komz a raen. Harzet m'eus trumm, chomet eo ar baloñs en aer e-giz ur baloñs basket, troet en deus ha skoet ar pal difreuzh.

Ur grec'henn hir deus Waverly da Spruce (war an tu all, davet Hillside). Ur grec'henn hir, reutoc'h-reutañ betek Spruce. Ar straed-se a gase da

greiz kêr. Dre aze e tremenent, 'n ur ziskenn. Ha  
buan ha buan da laez ar c'hrec'h, davet ar merc'hed  
hag ar milk bar. Cheñch dilhad e-kreiz ar straed,  
un dilhad tefival. Gloan du.

Pevar korn, ar bed a-bezh a vez gwelet deus  
amañ. Ar broioù izel memes.

Brezhoneg gant Gwendal DENEZ

Yann-Fulup FOLLET

DAMWELET EM HUNVRE

Setu kezeg war ar mor ha kastilli goulou,  
Damwelet int em huñvre, ha kizellet int re zon,  
Evel e maen, dindan al loargann a gan.  
Kizellet on en douar, e sioulder ar beure,  
Ur beure a zaskren e-kreiz ar vroenn c'hleeb.  
Kizellet on, war sav en avel-c'hoañv,  
Gwriziennet en ur bed dall, ur bed all...

Ur bed divarrek da skuilh un daeraouenn evidon  
Nag evit va bro, ur bed marteze ha na dalvez  
Ket ar boan, zoken, ez afe un eviti da strakañ  
Brulu war Venez Arre... Ur bed e pep amzer  
Hep kevrin, ha leun a bouldrenn, hogen evel-se 'mañ  
Abaoc pell, ur bed yen ha mut ; me a garfe  
Bevañ e prajoù al loar, dindan youc'h  
Al laboused gwenn evel askell ar skrev.  
Me a garfe bevañ en ur bed gant frond  
An holl vleunioù, met amañ ne gaver netra ebet...  
Eo, louzeier lous muioc'h-muiañ,  
Kresket a-builh, louzeier fall, loen iskis  
Heñvel ouzh an eoul-mañ...  
Va faourkaezh bro, n'eo ket warc'hoazh e teuio  
An deiz ma vo kollet da dristidigezh.

Ar beure morlivet, limestra, hag a guzh gant e ouel  
Poulladoù an devezh, poulladoù lintrus ha boull  
An amzer-dremenet. Tarzh an deiz en em

Stlej hag an arvest a zo re griz, re ziaes  
Da c'houzafiv. Dont a ran eus aochoù an douar,  
E-lec'h e tiwanas ar mor sklaer hag e rae ar gwez  
Trouz. Selaouit...

Selaouit ouzh ene kuzh al laboused o hiboudiñ,  
Laboused dianav e peoc'h ar c'hoad, e-kichen  
ar rec'hier glizik ha dizremmet. Safar d'an distruj.  
Ne gomprenan ket perak eo du pep tra.  
Tarzh an deiz 'zo kouezhet, bannet on ivez  
Diouzh an oabl. Me a garfe kemmañ va huñvre  
Ha beajifi... Mont a ran trema un enezenn, da  
Gaut bleuñv an eonenn, ha mil skolp al loar.

E-tal an dour eo manet marteze reuz ar bed,  
Bremañ e vo ret deomp empentifi ur roc'h,  
Un tevenn ha na vint ket divuhez, na vefent ket  
Koufonet gant al liv-se hag ar c'hwez-se...  
Hastomp buan... Em c'halon, ar garantez evit  
Tarzh ar mor war an aod a dav, em bro e tav  
Kened heson ha estlammus an amzer-dremenet...

Pa baro an heol, e vo ret d'an avel skubañ  
Ar c'hleñved du-se, ha gallout a raio  
Ar glav diverañ goustadik war ar rec'hier  
Hep bezañ louzet, evel daeroù ur stivell.  
Hag an ec'honder a vo neuze din, en amzer-da-zont  
War enaou e vo ar felu, ar glizh-mor,  
An abardaez, an neñv steredennet ha sklerijennet.

Yann-Fulub FOLLET

OROGELL

Er beure lent, eus donder ar c'hantvedoù  
E oa tamolodet ledenez ar vuhez  
E rusk an noz, morzet gant ar riv  
Evel ur minic'hi ; ar vuhez a oa hanter-gousket  
Ha ne gleve mann...

Skrebeilhet e oa he daoulagad c'hoazh  
Miret he doa sell ur ganevedenn  
Gwenc'hoarzh an heiz, diweuz gleb ar c'hlizhenn  
Er ruzigenn glouar e strivate didrouz  
Evit bezañ dihunet...

Ganet e oa ar gouloù-deiz tamm-ha-tamm  
A-c'hwen he c'hein e oa bremañ an noz  
Digeriñ a ra ar vuhez he malvinier  
Hogen n'eo ket nerzhus-tre,  
Un den javellek e lavarfed...

Treuzigellañ a ra pa c'hell en em welout  
En dour, en un toull-kurun pe en ur gibell vihan  
Pe dost d'ur stank ; an deiz a gristilh  
En avel, a sun sioulder ar beure  
En em veuziñ 'ra...

E tromorenoù an andonioù  
Dent ar vuhez a blaouia ar vavouzen leizh  
Difluk eo strinkenn da c'hanedigezh,  
Beure, an oabl a gemer ar gwennili  
En e zorn...

Ar stlañ war ribl an dour a vazailha don  
Al loened a zibikouz o daoulagad ; sev ar spern  
A spluj er bannoù-heol, ar raoskl hag ar braoz  
O deus frond sin ha mezevellus ar fru,  
Trellus eo an douar...

Levenez dirak al lanv skedus-se,  
Levenez o vevañ ar beure-mañ, o welout  
Ar gouerioù lintrus, ar vuhez o huñvreal  
War vardell ar puñs, hep anavezout mab-den  
Brav eo al liorz...

Al liorz ne anavez ket birbilh an deiz  
Nemet sarac'h ar skourroùigoù, lirzhin ha seder ;  
Met ar beure ne reas nemet tremen, 'vel ur  
Bugel a hañval redek goude an amzer, prim-prim  
Emañ ar beure o weñviñ...

Skrimpal a ra ur wech diwezhañ  
Dirak ar gellann ; e skeud an amzer  
Eo aet da get al levenez, kuzhet  
Dindan an diskar, an douar torosennek  
Ar mor skosellek...

Kuzhet dindan vogerioù bili an aodoù ;  
Ar beure a gluchas a-dreñv ar yeun  
Fraost ha krin 'vo an endervezh, an amzer da zont  
Ar redele a gas ar vuhez gantañ, n'heller ket  
Bezañ ha bezañ bet...

An hini a yelo e-barzh, ez taeroù  
Na zeuio ket er-maez ; diere out c'hoazh

Met ar beure n'eo nemet ludu, ur goanag  
Skarn ha dibourc'het az poa pep mintin,  
Pa zihunes melkonius...

Ar goanag... heklev da vuhez pemdeziek  
Karet az pefe youc'hal d'ar bed da zigenvez  
Da aon ha da zoan ; fellout a rafe din kemenn  
D'an dud e oa kollet ar beure hag ar vuhez...  
Didu out bremañ...

Gwenn eo da zaouarn, ra lidlazhint  
An noz e-lec'h ar sklerijenn evit ma vezimp eürus  
Kerzh ha klask da hent...  
Na zistro ket, a-dreñv,  
N'eus ket ken a veure.....



## keleier skrid

PRIZ LANGLEIZ 1978 - N'eo ket daou briz met pevar a zo bet roet d'ar 16 z viz Kerzu e Sant Brieg : daou briz evit oberennoù komz plaen, unan evit ar varzhoniezh hag unan all evit un droidigezh. Kalz skridoù a oa bet kaset ha diaes eo bet d'ar varnerien ober un dibab. Soñjet o dues koulskoude e oa ret broudañ ar re yaouank. Ar priz kentañ a zo aet gant Tudual HUON evit e "b-Pemp kontadenn" hag an eil gant Goulc'hen KERVELLA evit e romant. Daou vrezhoneger a-vihanig int. Ur stag emaint oc'h ober evit ar mare. Padout a ra ur bloaz ha paet eo gant ar stad. Minister an arme eo an hini a ra war-dro ar stajoù-se...

Evit pezh a sell ouzh ar varzhoniezh eo aet ar maout gant PER DIOLIER evit e oberenn : "AR VEAJ-SE UR WECH E OA". Pa lenner AL LIAMM e ouzer emañ aze en e voued leun ! Ar pevare priz a zo aet gant an Aotrou Per BOURDELLES evit bezañ lakaet e brezhoneg an "Divina Comedia". Ar varnerien o deus ivez roet ur meneg da Anjela DUVAL : "Barzhonegoù Nevez" ha da Alan an DIUZET : "Gwad ar Garantez".

Emañ SKOL o paouez embann daou romant e brezhoneg eeun evit ar re a zo o teskiñ brezhoneg hag a fell dezho lenn levrioù aes. Skrivet eo an daou romant gant Roparz HEMON, ha strollet int en ul levr.

- RE BENNAVEL a gont buhez ur familh war-dro ar bloavezhioù 2000.

- UR PRENESTR A OA DIGOR a zo un istor polis.

Daouzek lur e koust al levr ha ret eo skrivañ da : SKOL, Yola Chariou, 16 straed Berlioz, 22000 Sant Brieg, CCP 2616-33 Roazhon.

AL LIAMM - Gouestlet eo an niverenn 190 da Roparz HEMON. Pennadoù a gaver diwar benn buhez ar skrivagner, testenioù, barzhonegoù ha kalzig skeudenoù. E-barzh an niverenn 191 ez eus barzhonegoù gant Benead hag Anjela Duval, danevelloù gant Olier ar Mogn ha Reun ar C'halan ha pennadoù gant Maodez Glanddour hag Anjela Duval diwar-benn Roparz Hemon.

Koumanant : 50 lur, Per ar Bihan, 15, straed des Fours à Chaux, 35400 Sant Malo, CCP 5349 06 A, Paris. Goulennit ivez pegsun AL LIAMM (5 lur).

Aozet e vez gant SKOL AN EMSAV ur genstrivadeg bannoù treset. Digor eo d'an holl gant ma vezo diembann an oberennoù. Dibabet 'vo ar pemp oberenn wellañ hag embannet e stumm ul levrig. Dedennet oc'h ? Skrivit da G-Wenole GEVEL, Ti nevez, Kerloegen, PLUGUEN, 29000 Kemper.

Ar gelaouenn PLURIEL a ra enklaskoù ha studiadenoù diwar-benn ar minorelezhioù. Gouestlet eo an niverenn 16 da Vro Okitania. Pennadoù a bep seurt ha barzhonegoù gant Roselina Rocha a vez kavet en niverenn-se.

Koumanant : 30 lur - PLURIEL - 6, rue de Tournon, 75006 Paris.

Labour Fanch ELEGOET : "UN DEN, UR VRO" a zo bet embannet e galleg. Titl al levr : "Mémoires d'un paysan du Léon". Ur studiadenn "l'identité négative" a gaver goude an destenn. Kavet e vez al levr er stalioù : 60 lur e kousto deoc'h.

Seurt testennoù a zo talvoudus kenañ e kefiver an istor (istor ar bobl) ha buhez ar gevredigezh. Ar yezhonourien a gavo ivez enno peadra da labourat.

BREIZH niverenn 242, miz C'hwevrer. Ur pennad diwar-benn Europa hag ar mor Atlantel, ur studiadenn gouestlet da Feval gant Yann Bouessel du Bourg. E-barzh BREIZH eo e vez embannet DIHUN, e brezhoneg nemetken. Ur pennad a lennor diwar-benn Bro Louizian gant Jorj Gwegen. Pennadoù Charlig ar Pismiger diwar-benn al levrioù ne vo ket dav deoc'h lenn anezho...

Koumanant : 40 lur, le Pradi Trédoin, 56250 ELVEN

OXYGENE-BRETAGNE - Niverenn unan. Setu ur gelaouenn a fell dezhi stourm a-enep an nukleel. Labour sirius ha pennadoù talvoudus. 4 lur e koust an niverenn. Ma fell deoc'h kaout displegadurioù, skrivit da : S.E.P.N.B. - Vallon du Stangallac'h - 29200 BREST.

LEVRIOU NEVEZ - EMBANNADURIOU AL LIAMM

- Yeun ar Gow , E Skeud Tour Bras Sant Jermen, 45 Lur + 10 % mizoù-kas.
  - Maodez Glanndour, Vijeled an Deiz Diwezhañ, (barzhonegoù) 16 lur pe 12 lur hervez ar paper.
  - Anjela Duval - Kan An Douar, 25 lur.
  - Levrioù evit ar vugale : Kroc'hen Azen, An Houadig divalav, Rouanez an Erc'h - 8 lur pep hini.
- Skrivañ da J. QUEILLE, 47, rue Notre Dame, 22000 Guingamp, CCP 1136 82 RENNES.

# lennit al liamm

# SKOL OBER

## SKOL EIL DEREZ OBER

Jacques THUERY

(Okitanat, skoliad eus Skol OBER. Desket brezhoneg gantañ).

## UR BALE ER C'HOAD

Dibar eo ar bale-se peogwir ne garan ket kalz ar c'hoadoù hag ez eo ret d'an darvoudoù bezañ dibar evidon evit mont da vale en ur c'hoad.

Daou viz a zo, tost da vat, e-pad m'edo e Pariz ar pennoù-stad afrikat, ur guzuliadeg a oa bet e Versailles, hag an holl dud-se a yeas da Bariz evit koaniañ. Eta... serret e voe Hent Meur ar C'hornog gant an archerien, e-pad un eur : kirri war-hed pemp lev war-du Rouan, ha muioc'h c'hoazh war-du Chartrez.

Hag e-kreiz ar mor-se e oan-me.

Dilezel a ris ar c'harr, hag ez is da gerzhout un tammig bihan e koad Marly. Pegen kaer ! Koad kozh Loeiz XIV, ha dek metr en traoù miliadoù a girri dindan an heol.

Hentoù disheoliek, bleunioù, brankoù sec'h, kement tra a ra ur c'hoad e gwirionez. Bale a

ris un tammig, da c'houde ec'h azezis war ur  
c'hef evit prederiañ diwar-benn ar vuhez dre vras.

Dezougen a ris un nebeut bleunioù hag a zo  
bepred sec'h war va zaol.

Ha n'eo ket ken alies-se e c'heller karr-  
diañ e-kreiz Hent Meur ar C'hornog.

---

SKOL OBER

Gwaremm Leurven

PLUFUR

22310 PLESTIN

---

---

# **lennit**

## **TROIOÙ KAER**

# **tintin**

## **e brezhoneg**

### **EMBANNET GANT**

### **CASTERMAN**

Koumanantit da S K R I D

Koumanant evit 4 niverenn : 30 lur.

Kas da : P. DENIS  
Le Ris - Ploaré  
29100 DOUARNENEZ

CCP P. DENIS - 1499-51 RENNES.

Kas ar skridoù da Gwendal DENEZ (memes chomlec'h)

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ  
LEZENN.

KENTAN TRIMIZIAD 1979.

MOULET E ROAZHON.

TI MOULEREZH PREVEZ.

MEROUR: PER DENEZ.

